

KLOAREC KOAT AR RANNOU

A PENN-HERES KERSANTON



War don : *Kurunen aour ha perlez an Itron Varia-Remengol.*

Karantez a glac'har !

I
 Tud iouannq, à Vreiz-Izel distodait da glevet
 Ar recit euz va dañiou ha va foanieu kalet :
 Me zo eur c'hoarek iaouank a eskopti Quemper
 Am boa choaset eur vestrez en eskopti Treguer,
 A c'haars ar mor oun ganet en bro sant Gwénole,
 Ha biscoas nemet glac'har nem eus bed em bue ;
Glac'har a guir garantez setu ma flaneden.
 Planedon rust a'kalet da heuile pen da ben.
 Pa oan em bugaleac'h, va vam baour aliez
 A lavaret din : « Va mab, var ar bed, ar Werc'hez
 « Ped anezhi, va mabik, ped Gwerc'hez Remengol,
 « Mar e fedez a galon, biken ne ni da goll »
 Patrones ma mam dener, Gwerc'vad Remengol,
 Ped gweach oc'h euz hu miret da doun ma eat da goll
 He pedet am eus bepred, bremen araog mervel,
 E kanin he meulodi d'an breudeur Breiz Izel
 Pa guimiadiz dioc'h va zud da ziz pell euz ar guer,
 Evit mont var ar studi en kollach Landreguer,
 M'em boa nemet pemzek vloa, me a wele dourek,
 Rac evidon ne oa ken, alas !... a eureusdet !...
 O tostaat oc'h Landreguer e kavis eur plac'hik :
 Koant vel eun telik Doue he hanno oa Metik ;
 D'ar gouent a ze ive, doua d'ar studi,
 He c'halonic oa mantret kement a va hini.
 « Salud deoc'h plac'h iaouank a lavari dezhi,
 « Evel d'oun oc'h onkeniet ho kuitat tud ho ti,
 « Ho tornic flour em dormik laquet gant garantez,
 « Hac sesimp eurussoch'o wela assamblez. »
 Ar plae'hit a lavaras : « O cloarec Gwenole,
 « Pedomp Doue alies an eil evit eguielle
 « Er joa keuls hag en anken d'alc'hit sonj a Vetik
 « Euz a vreman da viken e o mestrezik

« — O Metik va c'harante, rozen ker Breiz Izel !
 « War ho mignon Gwenole tolet bremen eur zel,
 « Eur kell digant ho lagad a raf eurusted
 « Keit a ma lezo Dous ac'hanon war ar bed. »

Eru en kaér Landreguer, erru e penn non hent,
 Me oe kasset d'ar golach, ha Métik d'ar gouent ;
 An disparti oa kalet c'hue o hag ankeniuz,
 Au eurusdet er bed-man neo ket paduz !...

Der ma chomiz er golach skeuden dous Metik kez
 Enn deiz, enn noz diaison he deue aliez
 Neuze peden Doue ha zen kos Breiz Izel,
 Vit ma vije en e bue, laouen evureuz zantel.

II

Pa eo achut va studi en hiz d'a Remengoll,
 Da bedi c'hoas evit hi Gwerc'hez vad *Remed oll*,
 Seiz tro a riz d'an noter. devez a pardoun bras,
 Ha seiz tro d'an Ilz zarkr war ben ma zaoulin noaz,

Goude an offeren bred, o pebeuz levenez !...
 Er vered, gant e man ger, e velis Metik kez
 Laoaen eo evel an deiz. ha éoant evel al loar
 Biscoaz pen herez ken koant n'euz bet var an douar,

Lugerni a re he zall, he diou chod gwen a ru,
 He gueno vel eur rosen. he bleo, he lagad du,
 Eur groaz aour en he c'herc'hen, e o'hoef dantelezez
 Lavaret vije eun tell euz an év diskennet.

« O pebeus joa evidomp va c'hoarec Gwenole,
 « En em gaout en Remengoll deis pardon mam Doue
 « Mam en oll dud ankeniet, Gwenole ma mignon,
 « Evidom e pep amzer he fediz a galon.

« — Metik koant, setu aman, eur voalen aour,
 « A roas din araog mervel, Anaik va mam baour,
 « Doug anezhi var da viz, kemper hi digan en,
 « Me dou war goaled ma mam d'ez karet da viken.

— Ar groas aour zo em c'herc'hen a vo dit Gwenole,
 « Eur guchen euz va bleo a roan did iye ;
 « War ar groas e truan a dirag ar Werc'hes
 « E vi karet aant Metik, tre ma vo en bue. »

Ha daoulinet en ilis, hon deuz gred eur beden,
 A roet evet effrancs, eur c'houris kcar melen,
 Beniguet ho meladen, poket da relegou,
 Da relegon Sant-Briez karet gant ho tadou.

Goude hoe euz baleett hon daou da Breiz-Izel,
 Ho guele kalz ilizou ; kalz a dourio huel,
 Abatti Landevennec, ha mor Douarnenez,
 Lec'h ma oa Ker-Is hag or princes Athez.

Gwelet hon euz Mene-Hom, hag illiz veur Quemper.
 Mene-Bre, illiz Bulat hag hini Landreguer,
 Kastel-Brest, Sant-Ian ar Bis, illiz Salaün-ar-Foll
 A kaera tour zo er bed, tour huel-Kastel Pol

Gwelet hon euz Ker-Athès, Kemperlé, Pont n'Abat,
 Fouesnan, bro ar merc'het koant, Guengamp hag Huelgoad
 Montroulez a Lau Huon, Kroason a Les n'Even,
 Kallac, Bro ar gourino, Kastel-Lin, Rosporden.

Klevet hon euz e krosal a mor beg a Raz,
 Biscoaz den naentrennanz eb santout aou pe c'has,
 Bet omp en eue Sinun, en Rouesear Molenez,
 En enez Vaz, er Iodet, iye er Seiz-Enez,

Eur blavez o r'p bet euruz evel eal Doue.
 A setu lec'h pa ho guele an oll a lavaret,
 « Setu kloaret ar Rannou, soul evel eur serven,
 « Setu Metik, e vestrez, fresq evel eur rosen, »

III

Devez pardon Sant-Herbot, e klevis eur c'helou
 En euz beuzet ma c'halon en eur mor a zaëlou,
 Gant e zad ha gant e mam d'am mestrezik Metik,
 E oa choaset d'a bried eur Pagan pinvidic.

Ar pagant ze on diot hep furnez, hep skiant,
 Ne gare war an douar nemet ar gwin ardant
 Metik paour, ps e gwele a grene gant ankrez,
 Hoguen, he zud oa daellet alias ! gant an davez !

Mont a riz prim da gwelet neuze da Gerzanton,
 Dre ma tostaen, em c'kreiz a grene ma c'halon ;
 War dachen ar bourg e son e oa ar biniou,
 Tud an eured ha Metik beuzet en eaelou.

Metik, a dreuze a daelou a reaz ouzin eur sel
 En eur lavaret, kouraj, mignon, fidet !
 Monet a ra en ilis lavaret ra d'ar belek :
 Guenole eo a garan hag hen vo va fried !

Kouzes raze d'an douar ractal ar ben-herez,
 Ha douguet eo dioch'tu euz an iliz er mez.
 Dispak en c'hoef, e qillat a dispak e bleo ;
 Seplantout a ra beza eun elik paour maro.

Mantret oll gant a glac'har e kouezic d'an daoulin.
 En eur grial : O Meuk zell a drue ouzin ?
 Pokat a riz d'he dormik d'he diou chod, d'he c'herc'hen,
 O Metik ! Metik ! Metik ! pehini a garien !

An dissesper en deo din, evel eur mentel blom,
 A chassos pell ac'hanoù, pell war zu Mene-Hom
 Va skiant a zo collet va c'halon a zo ien,
 O Metik ! Metik ! Metik ! pehini a garien !

Eiz de goude, aseet e kreiz koat a Rannou.
 War va diou chod a red diou feuteun a zaëlou.
 Pa glevis e Remengol o zon anter noz,
 E lavaris esklamet : « Va Doue deoc'h bennoz.

« O Gwerc'hes vad Remengol, selit ouz va glac'har.
 « Amant oun deud da verval breman war ho touar ;

« Varc'hoaz, pa savo an eol arc'hanter en envou,
 « Dindan ar derven goz me a vo cavet maro !,

« O metik, va douzik koant, p'hini a garien,
 « Kenavo laran did er bed man da viken,
 « Gant ar maro unanet ni c'hoas en eun garo,
 « Kenavo er barados, kenavo, kenavo !!!..

IV.

An de variec'h da sav eol, eun durzunel hep par,
 A hirvoude en derven he c'blemou a glac'har ;
 Ar chloareck a oa maro gant an anken
 En eur lavaret Metik ! te pehini a garien !

Ar chloareck paour a starde c'hoas a vuzeillou
 Kroas aour a bleo du Metik glebiet gant e zaëlou,
 War an derven doa scrivet hano e garante,
 Aa diou galon unanet treuzet gant eur c'heve,

Kasset oa bet ar chloareck da vered Remengol,
 Pa sebeliet e dishoel iliz zakr Remed oll !
 Illiz patronez he vam he deuz bet ken karet,
 Tad iouanq da Vreiz-Izel, pedip vithan beprat,

Setu eta Gwenole en e wale douar !!!
 Eua mis goude eo klevet hanadou glac'har .,
 Eur plac'hik gwisket en du end bered Remengol,
 Don di da bedi Doue a Guerc'hez Remed oll

O nemen dre ar vered, velas var eur men be,
 Scrivet neve flamm hanou e mignon Guenole,
 Epad an noz daoulinnet, Metik wele doureke,
 Hamar men be e poke, e poke kaloneq.

« O Gwenole emezi, setu te en repos,
 « En douar zakr Remengol ez out deut d'am gortoz
 « Me ken ma stardo an de o ma muia karet.
 « Er be man, dre zora Doue, ni vez unanet !!!

Da sav heol, eur belfec kos, vont da bedi Doue,
 He chavas anter varo gourveet war ar men be ;
 Rei a raz d'ar piach'ik gaour absolen a pardon,
 Metik varvaz laouen raktal gant ran kalon ! ..

En eur vogeden ezans ene gwen Metik kez,
 Vel eur goulnik a mijas d'au ev gant au telez ;
 Euz a varadoz Doue eur goarent archantet,
 War tour illiz Remengol, neuze zo diskennet.

War ar goabren ar Werc'hes ha Sent kos Breiz-Izel
 Deus kurunen Gwenole, hac e vestres sanctel ;
 Barzet an amzer goechal, drant war e solennou
 Da zoue, en Brezonnek, e gane he gwerziou,

Sebeliet he korf Metik, kichen koat Gwenole,
 Ar maro deuz unanet eil gant eguielle.
 Eur chloareck karantezouz neuze var o be skrivet,
 Ar chomzo truezouz man, gant e zaelou mesket

« Aman repos en peoc'h kloarek Coat a Rannou
 « Den a feiz hag a galon, den a garie er ero ;
 « En e guchen eo kousket penn-herez Kerganton,
 « Metik an elik Doue, maro gant rann galon !!!

O Gwerc'hes vad Remengol, setu o tau buguel
 Kousket en tall ac'h iliz ha dindan ho askel
 Vel eur vam karantezouz war gavel e mabik
 Chouli dolio evez war be Gwenole ha Metik !!!

Kleir, ougrou Remengol, truezouz c'hiu sono ;
 Barsat ha pelerinet, daelou c'hoi a skuilo,
 War be Metik Gwenole, pa refet ho peden,
 Eur beden a garante a carguet a auken ?

Bevit en doujanç Doue, tud iaouank Breiz-Izel,
 Pedit Gwerc'hes Remengol, evit ma viot sanctel ;
 Sonjite iye e Meuk, sonjet e Gwenole,
 Bevit evel the fidel an eil d'eguile.